

DIHUNAMB !

BRETONEZ ...

(Aotréadureh nⁿ Pc 810)

En arben d'er papér bout deit de vout gloèu,
éh es gourhemennet demb, èl d'en ol papérieu, bihan-
nat nivér hor pajenneu.

Krennad :

- L. H. : Hor ré tostan kar. —
LOEIZA ER MELINÉR : Ha n'hé doè hoch ' me.
ugent vlé ! —
Dihustelleu. —
Kevérereh er skolieu. —
Lévreu neùé. —
L. HERRIEU : Kamdro en Ankeu.

ER BLÉAD :

20 lur eit Breih; 22 lur aveit Bro-Frans.

Burèu "Dihunamb" EN HENBONT c/c. 241.28 Nantes

Kernel de glab hou tillad de di **E. HINGAND**

28, ér Ru Neùé — HENBONT

Hui gavo ino pep sord dillad
eit goased, tud iouank bugalé
Dillad groeit revé hou korv
Labour groeit mat
Kement sort dañé ag er hetan
er marhadmatan e fêhé bout

DILLAD LABOUR
deit ag en tiér guellan
« A. Lafont »
« Le Costaud »
« L'Inusable »
« Le Coltin Parisien »
Dillad glaù « Torrilhon »

En arben ag er uerh vras hon es é hellamb guerhein
marhadmatoh eit ne vern pé ti.

Tud a gosté Henbont!

Mar hues dobér a lezeuaj eit gobér drammeu d'en dud ha d'el
loñned; a ourizieu énep d'er forsadur (hernie); a dreu eit gobér
ardro er vugalé vihan; a suan goust huek hag a dreu aveit em-
néstat pé em-gaerat; a lezeu énep d'er fal loñned; a remedeu loñned;
a liù hag a dreu eit en dillad, en tiér, er glustraj, eit ou liùen pé
ou hampen, kerbet hardih mat de di

F. SIMON, Lezeouour-Gourizour

43, ru Trottier, HENBONT

*un dén ag er vro, e oui brehoneg hag e rei deoh er guellan dege-
mér, en ur uerhein deoh pep tra guel marhad eit é léh aral.*

É **TI-SÉ HOAH** : Mar hues luneteu de brénein, diar papér ur
médesinour-deulagad; aveit gout ha dobér hues a luneteu J.
SIMON, er mab, luneteur a vechér, arnodadet E. F. O. M., e vu-
zulo hou selleu eit nitra hag e arajo aben neu luneteu torret. Er
guellan luneteu.

R. C. Lorient, n° 8155

*Ul lézen ag er 24 a viz Guengolo 1941 e zihuen
a obér brud én dro d'en alkohol. Daù é bet demb enta
lemel en embann e oè ama.*

Glustraj

PRENEIN GLUSTRAJ nen dé ket
un hoari : Chonjet mat éraok prénein
Arlerh é vo dévéhat deoh en devout ké

Glustraj koed tiù

deit a di **E. HINGAND**, 28 ér ru Neùé, HENBONT
e zeliét kemér, rak men dint groeit mat, braù, hag achiù. A
gaost de gement-sen é mant ken istimet.

Koed ag er hetan : michérerion ag en dibab e vé dob
ou gobér.

Prenein ha guerhein e hramb glustreu koh diar er n
hag obér é hramb getè glustreu aral.

EN APOTIKEREH KREIZ KER
(Ti RENOULT, kent)

61, ru er Morbihan (ru en Iliz) ha ru des Colonies én ORIENT
dalhet get en E.

J. BELLEISSUE

APOTIKER AG ER HETAN SKLAS A SKOL VRAS PARIZ

é kavér drammeu, lezeuaj, ha remedeu a bep sort eit en dud hag
el loñned. En dud a ziar er méz e ia gozik rah d'en ti-sé de gl
ou remedeu.

En Apotikér e oui konz brehoneg

BOMBARD - BINIEU

MUZIK A VREIH - PLADENNEU

G. OLLIVAUX

4, ar er Bôve (étal en Hoaridi)

Peigonzér : 4-21

EN ORIENT

Chaussures BOISSELIER

12, Rue er Fetan, en ORIENT

6 Médalen eur. 3 Prim bras

Ti a flans
sañet er blé 1881

EN TI LÉH MA KAVÉR ER MUIAN DE CHOÉJ
BOTEU-LÉR AG ER MOD NEUÉ.

BOUT E ZO A GEMENT SORD, A GEMENT LIU,
A GEMENT PRIZ E ZO, AVEIT GOAZED, MERHED,
BUGALÉ.

BOTEU-LÉR AVEIT EUREDEU HA LIDEU

Kampennet e vè en treid én ti

Komz e hrér brehoneg

Ul lézen ag er 24 a viz Guengolo 1941 e zihuen
a obér brud én dro d'en alkohol. Daù é bet demb enta
lemel en embann e oè ama.

Hor ré tostan kar

Bout e zo Fransizion ha n'hellant ket mui tagein get ur geu :
vè vras geuiér ou des laret...

Un eutru F. M. Gorjux, deit d'en Oriant de zispleg er « uirioné »
d'er « Fransizion iouank » n'en des ket gellet parrat, én ur
predeg, a gomz a Vreih hag ag er broieü keltiek, aveit dispieg é
ma tostoh kar er Vretoned d'er Fransizion eget d'er Gelted ag
er broieü-sé.

« A-t-on songé, emé ean, aux différences linguistiques (entre
toutes ces régions ? LA PLUS PROCHE PARENTE DE LA
BRETAGNE, C'EST LA FRANCE... »

Pen dé guir é lar, e teli bout guir. Ha nezé, é vehé tostoh er
brehoneg d'er galleg eget d'er iehou keltiek aral !

Èl ma skriü dein ur heneil, goudé bout lénnnet me fennad diar
er Geuiér de ziskan, er Fransizion èl Gorjux e zisk demb penaos :
« Nos grands-pères étaient des Gaulois; nos pères étaient des
Francs. C'est pourquoi nous sommes des latins ! Rien de plus lo-
gique, n'est-ce pas ? »

Met setu, hon tud koh-ni ne oent ket na Gaulois, na Francs, ha
nen domb ket-ni Latins, met tam erbet.

Ne uélan ket nezé penaos é hellehemb bout er ré tostan kar
d'er Fransizion ? Azé éh es hoah ur mistér ha n'en des nameit
tud gouiek, èl Gorjux, hag e hel er splannat.

Guélamb doh tu er ieh, ha bout e vehé muioh er uirioné geton.
Kemeramb eit kement-sé un nebed girieü ag er ré pennan hag
e impléér é kement bro e zo.

BREHONEG	KEMBRÉEG	GALLEG
mam	mam	mère
tad	tad	père
bara	bara	pain
guin	gwin	vin
pen	pen	tête
gar	gar	jambe
ka'on	calon	cœur
halen	halen	sel
guir	gwir	vrai

Gorjux, ean, e laro deoh é ma er girieü galleg e zo en tostan
d'er ré brehonek hag er Fransizion en tostan kar d'er Vretoned !

Me zad-koh, pe vehé brema ar en doar, ne hoarhehè ket kalz
a pe zehè Gallandou Diouf, kannad du er Sénégal ha « Français »
mat, de laret « kanderù » dehon ! ...

L. H.

Ha n'hé doé 'met ugent vlé !

Get *LOEIZA ER MELINÉR*

ER gouiañù e oè hag erh e hrè. Péh malùenneu tiù e goéhè stank, stank, hag ember éh oè guen kann el len kléret, er chaochér, er rodeu melin, er bodeu hesk; guen kann ol en tiér.

Divourapl e oè bout ér méz. Abret éh oè bet cherret dor en ti-tan, ha sparlet mat get er morailh hoarn tiù, rak huéhein kriù e hrè en aùél.

Ur gohad tan ru ar en oaled don e duemmè hag e splannè d'en tiad tud azéet doh taol; é koénein éh oemb. Er hoazed e zivizè diar ou deùeh labour, diar en amzér, ha ni, merhed, étal en oaled, ni cheleùè dohtë pé ni hragellè d'hon tu.

Na bourus é kaven-mé en termen-sé ag en deùeh, a pe oen kroèdur ! Na bourein e hren é sellet doh er choucheu koed én tan, é ruein ! é loskein, é luduein, ar ou goarigeu ! Nag er ouleuen-rousin lakeit ér « paotr Franséz » én toul-fornel, peger bourus é kaven-mé hé divouchein, ha kemér er rousin e zivèré doh er borhaden, eit ou zurel de veruein én tan !

Met, un dra dreistoll e blijè dein ; chetu petra : ruein e hren ur vrochen hoarn én tan hag hé boutein ém guérennad chistr aveit tuemmet dehi. Fioñdein, skumennein ha berùein e hrè er chistr ker braù ! Ken n'er haveh en hantér matoh arlerh ! Sonjeu kroèdur...

Sonjeu bourus a pe gleuen er grillan é krikal didan er maen fornèl hag a pe uélen balansér en orloj é luskellat a glei de zeheu, a zeheu de glei, hep diskuih, én ul luhein èl ur péh eur bras. Sonjeu trist a pe gleuen en aùél é huéhein ér gué dizélet, ken ne darhè er bareu èl a pe vér get ur vohal é tiskar koed. Sonjeu melkonius a pe sonjen éh oè tud ar en henteu didan er seih amzér.

En nozeh-hont éh oè kentoh klouhañnek me spered. Ne ouien ket perak. Marsé rak ma huéhè en aùél ré griù é beg er cheminal ha ma tè er moged endro én ti a gohadeu. Ataù ne zevalè ket forh kaer me hoén ha seleuet e hren doh ne ouian ket petra; doh un trouz bouar, un trouz mouget, étal en nor.

Ia, bout e oè unan bennak é skoein é voteu ar en trezeu, eit distag en erh. Skoein e hrè me halon èl un orloj; eun e zè dein ha muioh hoah a druhé a pe gredezan kleuet ur voéh doh 'n em-glem, pé é tifronkal én tioelded.

— 99 —

« Bout e zo unan bennak ér méz, e larezan-mé aben er fin. — Estroh eget unan, e oè respontet dein, ha nen dint ket eit bout hoanteit anéhè, er geih !

— Etal en nor-ni éh es un dén bennak, a daol sur, e larezan hoah, ha me gred é ma é houilein ».

Rah en tiad e cheleu hag ol é kleuamb ur voéh truhéus é houlen, get doujans, digor en nor abalamor de Zoué.

Ha setu me mam é kemér er houleuen suèu diar en daol; rak tioél dal e oè lost en ti, hag é vonet de zigor, en ur oulen più e oè étal en nor.

« Me garehè monet én ti, mar plij genoh, rak merùel e hrei me hroèdur genein didan en amzér kri-ma, e lar ur voéh plah.

— Deit abarh fonnapl, e lar me mam, en ur zigor a hantér en nor ha doh hé cherrein dohtu endro én arben d'en aùel.

Ha setu ur voéz iouank flam, ha guen kann hé dillad get en erh, é tostet dousigeu de greiz en ti, un roltad treu guen én hé diyreh.

Chomet e oemb ol souéhet de sellet dohti. Più e oè hi ? Petra e glaskè ? A veban é tè hi ? Petra e oè geti ?...

« Ur voéz kaeh a Vontreléz on-mé, emé hi. Klask e hran lojeris eit me hroèdur ha mé ». Hag hi de zizolein pen er béhig. Ur plahig deu viz e oè geti, stardet ar hé halon, biù ha dihun kaer !...

Er beurkaechig ne ouïè ket éh oè ién, é hrè erh, éh oè tioél en noz. Ne ouïè ket poén hé mam. « Tosteit d'en tan, moéz kaeh, emé me mam dehi; ha tapet hui ur gadoér duzé, emé hi dein-mé ».

Ha mé, ar men goar, én tioelded, de lost en ti, de glask ur skabèu d'er beuréz iouank.

Ne fien ket ré pellat doh en oaled : eun em boè ag en tioelded; eun a skedeu hir er hredansieu luhus; eun ma vehè bet unan bennak hoah é tistag erh azoh é voteu ar drezeu en ti. Nag eunus e vè ur hroèdur !

Eunus ha truhéus eùé; rak stardein e hrè me halon é huélet er vam iouank-ma éh azé ar er skabèu e ren dehi hag é tisplog ar hé barlen meherenneu ha lienneu mist hag é tuemmet hé merhig doh en tan.

« Setu er uéh getan, e larè hi étré hé dent, é freskan me hroèdur adal d'ur gohad tan. D'el liésan é ven én ur sulér, pé en ur hreu... Nag é peh stad éh on mé koéhet, men Doué ! »

Hag en dareu e dapennè ag hé deulagad ar hé bougenneu, ha tammeu erh e goéhè azoh hé bièu ar hé deuorn sklaset.

Dén erbet én ti ne zigorè é veg; goasket e oè er haloneu.

Ur misiù e gavè en élig-hont ar varlen duem hé mam; asten e hrè hé zreidigeu d'en tan, ou zennein e hrè geti endro a pe vezent ré duem, argomzal ha moushoarhet e hrè, èl a pe vehè bet é klask kalonekat hé mam beur.

Aben un herradig goudé, me mam, lan a druhé bepred doh er geih, e lar d'er vam :

« Gronnet hou kroèdur brema, me merh, ha débret koén. Vad eroalh e hrei un tam deoh, rak a bel é tet merhat ?

— Trugaré deoh, Intron, e respont hi. Monet e hrei koén genein get plijadur. Guerso n'em es ket bet begad erbet.

É borh Lanngedig em es kavet tuð vat hag en des reit rah en treu-ma dein, e lar hi én ur ziskoein er mehérenneu gloan hag el liéneu mist e oè én dro d'hé hroèdur. Kavout e hrér kaloneu truhéus guehavé, trugaré Doué... »

Epad mah oè me mam é trohein bara hag é kemér avaleu-douar eit er voéz iouank, honnen e hronnè hé merhig.

Ne ouian ket perak, nezé hé selleu ha me ré en em-gavas. Selleu lan a spont, selleu lan a néhans. Piket en doè me halon ken don, ken ne strimpas en deur ém deulagad, en despet dein, ha setu-mé é houilein èl ur Vadelén !

Kaer em boè asé miret a zifronkal, kaer em boè stardein ar mem beg get men deu zorn, ataù é tarhè me halonad.

Méh em boè hoah ohpen dirak er hoazed !

« Truhé e hués dohein, merhig, emé hi; léh e zo, rak goaleurus on ». Ha hi de rein dein hé hroèdur de zerhel épad ma tèbrè nañnek er bouid e rè me mam dehi.

Souret en doè hoah en ankén ar me halon, a pe sellen doh er plahig astennet ar men deulin. Krénein e hren kement, ken ne za eun dein ag hé guélet é rudellat genein én tan.

Goudé hé fred, en doè kennerheit ha hardiheit er vam iouank. Ha setu hé é tisplog demb hé buhégeh divalaù.

« Bet on bet eurus eùé, e larè hi; eurus é labourat é ti me zud; eurus é poénein bamdé. Épad me iouankiz n'em es ket gouiet petra oè en diové, en nan, er spont. Un ti em boè, ur guélé eùé, ha bouid men goalh.

Ha brema ? Diméet em boè, iouankik mat, ré iouank, allas ! Kredet em boè é rah er péh e vezè grateit dein : kredet é labour, én onestiz, ér reihted. Ha guélet em es ne vennér ket labourat. Kén nemet évet ha biùein èl ul lon...

Ha laret n'em es hoah ' met ugent vlé !...

Ne gredan ket mui tostet d'em zud; méh em es é vonet d'em bro. Neoah, ne chomein ket mui ér vuhé truhék-ma. Ul léh e glaskein de labourat, aveit desau me merh ».

Hag hi endro de ouilein, ken ne hejè hé filloteu ar hé hein. Er gach voéz !

Hé merhig en doè cherret hé deulagad épad ma tisplogé hé mam hé foénieu demb, ha moushoarhet e hrè dré hé housked, doh en éled péchans...

Kampennet hor boè ul léh d'er vam ha d'er hroèdur, aveit tremen en noz. Kent kuitat en ti, é trugarékas me mam eit hé madeleh, hag e hratas demb monet endro de Vontreléz de oulen harp get hé zud. Rak de ugent vlé é hellér hoah fiout ér vuhé...

Chomet e oen-mé pel amzér dihun em guélé, de sonjal ér plahig deulagad glas-sé em boè bet ar men deulin kroèdur. Ha kredein e hren, get me fé divrel é hellè er voéz iouank-sé, de ugent vlé, bout eurus hoah, én ur vuhégeh reihoh. Hé guélein e hren, dré me speréd, adsauet endro dehi hé ziegeh, é labourat hag é tesau hé merhig koant, pèl doh en henteu-pras, pèl doh er spont hag en diové...

Hiraeh em boè d'er mitin eit ou guélet ou diùig, étal en tan; hireih de gleuet er plahig é bragellat dirak en tan. Met siouah ! n'em boè ket ind guélet er mitin-sé, na biken goudé.

Abret mat en doè degoéhet un dén iouank ér velin de glask arlerh é voéz hag é groèdur.

Hag er voéz peur, tréhiet ha méhus en doè ean heuliet hep dihuen.

Guélet em boè hepkén trechad ou boteu én erh, é treuzein er penhé, eit monet trema en hent-pras.

DIHUSTELLEU

I. — Pehani é en délen mistan e gavér ér hoed ?

Respont : Un délen kelen.

II. — Più nen da ket de droein er préhésion, a pe vè en ol ?

Respont : Er ré e vè é soñnein er hlehiér.

RÉRAL :

I. — Petra ne hel ket Doué guélet, nag ur roué goal stank, hag e uel ur peizant èl ma kar ?

II. — Peh lon e zo en havalan doh er hab ?

KEVEREREH ER SKOLIEU

EIT 1942

Kloerdi - bras, Guéned

KETAN PAZEN

1. Guenhael Bauché; 2. Noel Offredo; 3. Yves Le Mentec;
4. F. Le Vaillant; 5. L. Le Ribouchon.

EIL PAZEN

1. Yves Le Bayon; 2. Maurice Gouzerh; 3. Pierre Coturel;
4. Jean Monnier; 5. Raoult.

Skol er Merhed, Bubri

EIL PAZEN

1. Marie-Joseph Cojan; 2. Maria Rousseau; 3. Marie-Anne Hellec;;
4. Nathalie Simon; 5. Mathurine Thomazo.

48 plahig en des heuliet er skol brehonek.

Sol er baotred, Noal-Pondi

KETAN PAZEN

1. Joseph Guilloux; 2. Yves Le Moullac; 3. Joseph Onno;
4. Lucien Bellicard; 5. André Dilhuit.

EIL PAZEN

Pierre Le Tohic; Robert Izanic; Robert Le Guerroué, Joseph Le Gallo; Joseph Porrot; François Le Thuaut; François Le Tohic; Ambroise Cobigo.

18 paotr en des heuliet er skol brehonek.

Skol er Merhed, Pléren

KETAN PAZEN

1. Geneviève Boléis; 2. Agnès Corignet; 3. Geneviève Gillet;
4. Céline Lidéc; 5. Jeanne Jouannot.

EIL PAZEN

1. Thérèse Boléis; 2. Thérèse Eveno; 3. Geneviève Le Lan;
4. Alphonsine Corignet; 5. Geneviève Mellec; 6. Anne Marie Ropert.

46 plahig en des heuliet er skol brehonek.

— 103 —

Skol er Merhed, Prederion

KETAN PAZEN

1. Anne Marie Niniven; 2. (a-hantér), Lucie Dréan ha Jeanne Bourvellec; 3. Marie Anne Carrer; 4. Joséphine Prono.

EIL PAZEN

1. Brigitte Le Guennec; 2. Cécile Kernec; 3. Simone Morantin;
4. Jeannine Le Guennec; 5. Yvonne Brient; 6. Germaine LE Stang.

30 plahig en des heuliet er skol brehonek.

Skol er baotred, Teis

KETAN PAZEN

1. Maurice Pichon; 2. André Lamour; 3. Antoine Le Brun;
4. Ange Le Bohec; 5. Marcel Cloeréc.

EIL PAZEN

1. François Quilliec; 2. Maurice Le Metour; 3. Jean Guého;
4. Clément Udo; 5. Rémi Taquet.

32 paotr en des heuliet er skol brehonek.

Er blé-mo éh es reit aveit 700 lur a lévreu brehonek de rannein étré er vugalé ha 1080 lur étré er vistr.

Reit hor behè bet muioh, get plijadur, a pe vehè bet degoéhet muioh a argant genemb eùé.



Lévreu koh — Lévreu neùé

Sav (niv. 23). É ma en dastumaden-ma é hounid, a nebedigeu, ul léh ag en dibab, émesk en dastumadenneu brehonek. Én nivéren-ma é kavér, é touch treu a bep sord, pennadeu talvoudus èl *Lai Osian e douar ar yaouankiz* get Y. En Diberder ha Y. Et Go; ul lihér, lan a furneh, skrivet get hennec diarben er *brehoneg biù* hag er *brehoneg neùé*, léh ma tispieg hor heneil é ma én hané ketan é kavér bepred diazé er ieh difistur.

Er fariadenneu e gav de huennat é obereu skrivagnerion èl R. Hémon, e zisko pegen diés é skriù é brehoneg iah hep bout darempredet er brehoneg biù, ha maget er spered get é droienneu dispar.

KAMDRO EN ANKEU

GET LOEIZ HERRIEU

Doh tu Reims nen dé ket bourus. É ma en tan é kén, é meur a dachad, ha karget é en oèbr a lostadeu moged é seùel diar en tiér é loskein.

É Mañné Therry é ma en tan é pemp pé huéh tachad. É flagen Reims eùé é tuem en treu. Me hompagnoneh goh e zo duhont ha hizitù é ta en doéré dein é ma bet dibennet, get un tam potin, er soudard Matelin Lamour, a Loguneh, hag e zo bet redour genein ér burèu araok ma ten kuit.

D'er 27 ha d'en 28 en des fardet er Germaned ar Hent en Intro-nézed. D'en 29 éh oè me hompagnoneh goh ér fozelleu, dirak manér er Malle (ér hreisnoz a Courcelles, a glei de Reims). Fardet en des en eneberion arnehi. Dalhet hé des pen deu zé dohtu, deusto d'er glaù potarneu, meç daù é bet dehi kilein pé bout dalhet : Deu a ré lahet, pear goalaozet ha pear skrapet en des kollet er gompagnoneh.

Ian a Veheuen. — De ziù eur de vitin é tér de laret demb é ma mal téhout ! A houdé déh de noz é tarh er thanoneu viloh eget bis-koah, ha merhat é ma ret, d'hor soudarded kilein.

De 6 eur de vitin, éh amb araok. Nen dé ket hir en hent, ha bourus é kerhet : kloar é, ha sammet nen domb ket.

Chetu er uéh ketan é pellan doh er bilig a pen dé é verù ! Ur misi e gavan, cher sonjal, get truhé, ér gansorted e zo duhont, én toul berù, étal Reims.

Ul léuig hon es d'obér, dré vesk er hoed, ken tinér é zél iouank, didan hoarh en dé. Ar hor goarigeu éh amb, én ur varbotat diar er péh e dremen.

É Ville-en-Selves (Kér-ér-Hoed) é chomamb. Mar dé braù hanù er vorhig-ma, hé zier nen dint ket ! En ur hoh ti éh omb lojet, hantér toul ha hantér brein. En noz ketan, é ma daù demb kousket ar ur guélé orsal hep tam plouz; rak n'hon es ket fiet diskarg hor hiri. Droug hon es d'hor hostéieu !

2. — Ne glaskamb ket neoah guellat hor stad, a pe larér demb ne chomemb ket ama.

Un herrad arlerh lein, é larér demb diskarg hor hiri. Ama é chomamb !

Gout e hramb, get er soudarded é tonet a Reims, penaos é ma oeit en treu duhont. Start é bet. Karget en des er Germaned, hep doujein nag en tenneu, nag er marù.

A LA SIBERIENNE

G. WINTER, FEUOUR

14, ru er Hetan, én ORIENT



Kerhet de glah hou mimieu hag hou skerbeu d'en ti-sé. Krohennenneu kaer Skungs hag Opposum; er ré e ia er guellan doh guiskemant Breih.

*Dillad gouiañù heb ur bañnen
Ne jaojant ket doh ur goanten !*

Kampennet hag aozet e vè kement sord « fourrure » get un dén a vechér.

NE VERN

 pesord remedeu e hues dober

AVEIT EN DUD,

AVEIT EL LÖNNED

groeit prest-ha-kaer pé de gampen, revé papér hou médesinour; gourizieu merhed, bugalé ha tud vras; *mar fal deoh bout chervijet mat ha fonapl* é ma daù deoh monet de di

L. JOLIVET

Apotikér ag er Hetan Sklas

Ru Trottier, HENBONT

(En ti tostan d'en iliz, é lein er ru)

Kerhet a berh *Dihunamb* hag é veet degeméret mat

é ti CHEVASSU

Horlojour hag Orfèbour

Ar dachen Bisson ha ru er Fetan' én ORIENT

É kaveet horlojeu, montreu, ranjennu a bep sord. Bi zeuiér kaer ha brageriseu aral. Boketeu-éred ha pep sord bijouteri.

Tud ieuank kosté en Orient kerhet d'en ti-sen de glah hou treu éred : é nep tu ne veet chervijet kerklous; é ti erbet ne gaveet kement de choéj.

Lénnerion ha lénnerézed *Dihunamb* e vou groeit anehè er guellan degemér.

Hui hel monet a fians d'en ti-men : ér hornad bro abéh ne gaveet marhadmatoh.

HOTEL TERMINUS

GUILLAS - ROY, Perhen

ADAL D'ER GAR VRAS

én Orient

PELGONZÉR : 1-62

Er guellan predeu; en ézémant brasan

TUD EN TI E GONZ BREHONEG

GIRIEU

NEN DINT KET ANAUET GET EN OL

Kannad : député
Kelted : Celtes
keltiek : celtique
kevéréreh : concours

malhen : flocon
pennan : principal
porhaden : mèche

MAR NE UËLET KET MAT

PE MAR VENNET ARMERH HOU TEULAGAD

Kerhet de glask luneteu
de di

PROST

*Ha n'en des kén luneteur nameiton,
ér hornad-bro, guir arnodadet.*

8, ru St Pierre, én Orient.

GUÉR A GEMENT SORD E ZO EIT SELLEU HIR PÉ
SELLEU BER, GUÉR ENEP D'ER VURLETEREH

PAPETERIE

LE BAYON-ROGER

13, Place Alsace-Lorraine

EN ORIENT



Ne fariet
ket
a di

Lévreu overen
Chapeleteu, Médalenneu
Statueu, Kristeu
Limajeu a zévosiön.

Treu, plu, papér ha pep tra eit er vugalé-sko
Lévreu ar er labour-doar ha réral

MOLLEREH

N'en des nameiti ag en hanà-sé
én Orient.

*Lihérieu-kanveu, pédeu-skriù
ha pep sord mollereh gallek
ha brehonek.*

Lénnnet mat :

Mar dé goanneit d'hou teulagad, pé mar dint bet bepred
goann ;

Ma ne uél ket mat hou pugalé hag é lakant ou lévreu
tost d'ou deulagad eit lénn; mar en em-glemmant get en
droug-pen;

Kerhet, a fiants kaer, d'er *Central' Optique*, 58 ru en
Iliz, en Oriant (ru Mal Foch, breman) léh ma vo muzulet,
hou kuéled ha reit deoh el luneteu e jaoj doh hou teulagad.

Tud kér ha peizanted

AVEIT EM UISKEIN HUI E GAVO É TI

LE BOURLAY, Kemener

24, ru Neùé én HENBONT

RAH EN DILLAD E HUES DOBÉR ANEHÈ
AVEIT GOAZED, KRENNARDED, BUGALÉ

RÉ GROEIT PREST-KAER, PÉ D'OBÉR DOH HOU KORV
DILLAD LABOUR « *LE MONT ST MICHEL* »; ER RÉ KRIU-
AN HAG, AR UN DRO, ER RÉ MARHADMATAN.

EN E. ER BOURLAY, UN DÉN AG ER VRO, E GONZ
BREHONEG.

L'Argus de la Presse

« *E UÉL KEMENT TRA* »

Saùet ér blé 1879. Mar fal deoh gouiet petra larér ahanoh ér
gazeteu, pé mar klasket gout er péh e skriùér diar en dra-man-dra
tr bed abéh skriùet d'er renour : 27 rue Bergère, IX. Pariz. Pelg.
Provence 16-14.

En eùéhour : L. HENRIO.

Mollech *Dihunamb*, 13, tachen Alsace-Lorraine, en Oriant.